




CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ

MAC'HARIT AN NOBLETZ.





CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ

MAC'HARIT AN NOBLETZ

*Demezel santel ha vertuzus, ha c'hoar
d'an den venerabl ha santel meurbet
Mikel an Nobletz, béleg, ghinidic eus
a barres Plouguerne, en Escopti Leon.*



Var ton : *Evit esperout en Doue.*

ME ho suppli oll, Christenien,
Clêvit eun dra a zo certen :
Imita Jesus a zo ret,
Mar fell deoc'h beza salvet.

Nep a imito ar vuez
Eus a Jesus leun a druez,
A vezo gant Doue caret,
Hac ivez sur recompancet.

An oll Zent hac ar Zentezet
O deveus bepret disprizet
Ar bed-màn gant e vanite,
Evit imita Mab Doue.

Renoncet o deveus ivez,
Er bed-màn, d'ar blijadurez,
Ha bevet gant humilite,
Mortifiet o bolonte.

Me zisclêrio, gant graç Doue,
Eun exempl a humilite,
Eun exempl a zevotion
Zo bet en escopti Leon.

En escopti-màn e zeus bet
Eur verc'hez nobl, fur ha parfet,
Zo bet santel en he buez,
Hanvet **MAC'HARIT AN NOBLETZ.**

A noblang vat eo sortiet:
Eur breur bêleg e deveus bet,
En deveus-hi bet instruet
Da imita Salver ar bed.

An den eürus Mikel Nobletz,
Bêleg santel en e vuez,
En deveus bet laket e c'hoar
Var an hent mad demeus e c'hloar.

Er maner ma zeo bet ganet,
Kerodern e zeo hanvet:
Eur maner nobl hac ancien;
Eur plaç santel a dra certain.

Roet en deveus bet Doue
Graçou bras ebars er plaç-se.
Deus ar maner-ze e zeus bet
Tud vertuzus bras sortiet.

Entre re-all, Mikel Nobletz,
Remerkabl bras en e vuez;
Eur bêleg pini en deus bet
Imitet mat Salver ar bed.

Kalz a viraclou a zo bet
Dre e bedennou êruet.
Doue a fell dezàn diskuez
Ar zantelez eus e vuez.

Mac'harit an Nobletz goude,
Servicherez vras da Zoue,
E deveus bet calz profitet
Eus a exempl he breur bêleg.

Eur veach all ivez goude
E velimp, gant sicour Doue,
Ar vertuziou ha carantez
Demeus o c'hoar, Anna Nobletz.

Disklêriomp bremàn ar vuez
Deus a Vac'harit an Nobletz :
Ar bed e deveus disprizet,
Hac an humilite caret.

En amzer ma roas mission
Ebars en Treguer, ha Leon,
Mikel Nobletz, güir servicheur
Da Jesus-Krist hon Redempteur.

Evit e gherent e pede
Alies an Autrou-Doue,
Evit goulen dezo graçou
Da bratika ar vertuziou.

Pinijennou a rê neuze,
Pere a offre da Zoue
A galon vat, gant carantez,
Evit Mac'harit a Nobletz.

Gant peb seurt enor ha respet
He yaouanqis e deveus bet
Tremenet en maner he zad,
Ha bet gantàn instruet mat.

Digant Doue e deveus bet
Eur speret vat, fur ha parfet ;
Eur galon nobl ha generus,
Hac ouz Doue carantezus.

He breur bêleg e devoa bet
Gant affection assistet ;
Abalamour da guement-se
Eviti e pede Doue.

En oat a bemp bloas varnuguent
En em lekas var ar güir hent
Da bratika a wir galon
Gant fervor an devotion.

Pa zantas he c'halon touchet ,
Ha gant Doue bet inspiret ,
Ec'h imitas humilite
Jesus-Krist , güir Vab da Zoue.

Disklêria a reas neuze
He dezir hac he bolonte
D'an den zantel Mikel Nobletz ,
Gant güir fizianç ha karantez.

An den zantel , gant eur joa vras
E c'hoar neuze a instruas
Da imita Salver ar bed
Gant humilite vras bepret.

Da zisprizout atao ar bed ,
Ha da gaout paciantet.
E c'helen a eure ivez
Da veva en eur güir furnez.

Rac-se , Mac'harit a Nobletz
A heuillas eur vuez nevez ,
Ha demeus a greiz he c'halon
En em roas d'an orêson.

Hac abalamour d'hon Zalver ,
He oll güiskamantchou kaer
A güittaas ivez neuze ;
Evit heuill an humilite.

Rêi a eure en aluzen
Eun habit zêiz a dra certain ,
Hac eun diamant a bris bras
Da eur baourez hi a roas.

Ar rest eus he güiskamantchou ,
Hak ivez ouc'hpen , he meublou ;
A galon oll ho renonças :
Netra anezo ne viras.

Miret a eure he leve ,
Rac abalamour da Zoue
E felle dezi asista
En necessite , an nessa.

Maner he zad a güitteas ,
En Montroulez en em rentas
Evit cundui he buez
Gant brassoc'h pinijen bemdez.

En Montroulez, en amzer-ze,
He breur bêleg he prezeghe,
Da rêi d'an oll instruction
Ha diski ar berfection.

Pa voa o tont da Vontroulez,
En hent e kavas eur baourez,
Eur bayzantez goal baour güisket
Gant dillat lien fall meurbet.

Bras e voa sur ar garantez
E devoa ouz ar baourentez:
He dillat mat a ziviskas,
Ha d'ar vaouez paour o roas.

Hac e leac'h he habit vat,
Neuze e kemeras timat
An habit lien e devoa
Ar baourez-se gant calz a joa.

O vertuz bras! ô karantez!
Cetu Mac'harit an Nobletz,
Evit imita Mab Doue,
En em visket er fêçon-ze.

He bleo kaer ivez a droc'has,
Hac e hent e cuntuas,
Ha varzu kêr a Vontroulez
E zeas Mac'harit an Nobletz.

Gant an dillat lien güisket
E zeo bet en em bresantet
Dirac he breur , Mikel Nobletz ,
Ar bêleg leun a zantelez.

He breur bêleg pa he güelas ,
En devoe eur joa meurbet bras
O velet e zoa commancet
Dija da zisprizout ar bed.

He breur a lavaras dezi
Dont bepret da guntinui
Da bratica'n humilite
Evit plijout da Vab Doue.

En amzer-ze e zoa bet
Un demezel convertisset (*)
Gant Doue dre e vadelez ,
Dre gomzou Mikel a Nobletz.

An den zantel a ordrenas
Ha d'e c'hoar e recommandas
En he c'hompagnunez beva ,
Ivez dezi oboissa.

Hac evit disprizout ar bed ,
Ha karout mat ar Groas bepret ;

(*) An Demezel a QUIZIDIC , marvet er c'hoer eus ar zantelez , hac entêret en ilis couent Sant-Frances , er parros Sant-Martin.

Neuze ivez , güisket ganti ,
Eun habit gris a ro dezi.

Rei a eure dezi ouzpen
Eur bissac'h great a lien ,
En he daouarn scudel coat ,
A vije ivez lekeat.

Cetu e pe guis e zeo bet
Mac'harit an Nobletz güisket ,
Ha d'an ilizou cunduet
Eghis eur plac'h simpl a speret.

Devez eur solemnite vras ,
Er fêçon-ze he c'hunduas ,
Ouc'hpen ivez recommandi
Da rêi an aluzen dezi.

En Montroulez en devez-se
Kalz aluzennou he devoe :
D'ar beorien o distribuas
Ar memes deiz gant eur joa vras.

Gant kalz e voe anavezet
Er fêçon-ze en em wisket ;
En em estoni a reant
O velet eur seurt chenchamant.

Goude , he breur he lekeas

En pansion enpad eur bloas
En tì eur vaouez er vro-màn, (*)
Paour eus a vadou ar bed-màn.

Eguis eur baouez e veve ;
Ar memes boued a guemere
Pe gant hini ar re baoura
A gustum beva er bed-mâ.

Evit he occupation,
Goude ober he orêson
Da c'hriat en em lakae,
Ha kementse a rê bemde.

Evit ar beorien paysantet
E zeuas ober assuret
Ar guiskamantchou necesser,
Oc'h implija mat e auzer.

Hac evit cavout ar voyen
Evit ober an aluzen,
En em reduize d'ar stat-se
Evit sicour memprou Doue.

Hac eus ar pez a receve
Bep bloavez evit he leve,
Hi a roe an aluzen
Evit soulaji ar beorien.

(*) Var barrios Sant-Martin.

He breur bêleg a roas dezi
Reglamantchou da gundui
He buez gant santelez vras,
Hac a galon o fraticas.

Hac ive deus an oll blaçou
Ma reas e Vissionou,
E scribe dezi lizerou
Leun eus a instructionou.

Karantez vras e deveus bet
Demeus ar baourentez bepret,
Hac en peb leac'h ec'h êrue,
En eur plaç paour hi a loje.

Hac ebars en Douarnenez
Eo bet Mac'harit an Nobletz;
Gant joa vras eo en em lojet
En eur c'hraouic dister meurbet.

Ha gant permission he breur,
Mignon Jesus, hon Redempteur,
Dre vœu demeus a chastete
En em gonsacras da Zoue.

He finijennou a greskas
Gant mortificationou bras:
Hac an dud en em estone
O velet penaos e veye.

Goulen a rê diouc'h hon Zalver
Eguis eur graç particulier
En e enor douguen ato
Ar Groas betec ar maro.

Certen pa vije offancet
Ha gant tud ar bed disprizet,
Var he bisach e remerket
Neuze eur joa vras meurbet.

Ar joa-ze ne alle ket
En nep fêçon dont da guzet,
Rac he c'harantez a voa bras
Ouz Jesus hac ouz ar Groas.

Hac eus kement poan a zouffre,
D'an Autrou-Doue o offre;
Hac en eur ober Sin ar Groas,
An drouc-speret a chasseas.

D'an amzer he devoa reglet
Bemdez e voa accustumet:
Enpad teir heur da viana
Meditation a rea.

He exerciçou mad nepret
N'o deveus ket e ampechet
Da zicour gant fidelite
An nessa en necessite.

Elec'h ma yê he breur béleg,
Da brezega Salver ar bed,
E zea Mac'harit ive
D'instrui merc'het ar vro-ze.

An daolennou a zisplike,
Hac meditation a rê
Gant ar merc'het en he c'hampric
Goude an exerciç publik.

Beza e devoa distaghet
E c'halon oll diouc'h ar bed;
En em rei en oll a eure
D'imita Jesus, Mab Doue.

Eguis ma zeo bet he buez
Eun exerciç a güir druez,
Êchuet eo ganti ivez
Oc'h exerci ar garantez.

Abaoue eur pennad amzer
Alies certen d'hon Zalver,
Gant dezir da velet Doue,
Bemdez en em recommande.

Doue a glêvas he feden:
Tostât a eure an termen,
Rac eun nebeut amzer goude
E zeas d'an eternite.

Da c'houel Sant Lauranç e zeas,
Gant carantez ec'h antreas
En tî eur vaouez vertuzus
A voe outi trugarezus.

Klân bras e voa ar vaouez-se;
Ne esperet ket e vevje;
Pemp crouadur hi e devoa,
Necesser bras dezo e voa.

Rac bian voa he bugale,
En doujanç Doue o instrue;
Mac'harit an Nobletz neuze
Truez bras outi e devoe.

O vertuz! ô carantez vras!
Clêvit-hu oll, bian ha bras:
Piou a elfe-ta arrêti
An daelou o consideri?

Mac'harit an Nobletz neuze
A galon a bedas Doue
Da zigas dezi ar c'hlênvet
Ha d'ar vaouez-se ar yec'het.

Biscoas certen ne voe güelet
Buannoc'h peden exaucet
Evel an hini a eure
Mac'harit an Nobletz neuze.

Souden goude e voe roet
Gant Doue dezi ar c'hlênvê,
Gant ar memes clênvê e voe
Attaket bars er moment-se.

Ha d'ar vaouez paour a voa clân,
Selaouit an dra-màn bremàn,
Parfetamant e voe rentet
Incontinent dezi yec'het.

Cetu Mac'harit an Nobletz
Prest da êchui he buez :
Hed pemp sizun voe afflijet,
Ha gant an derzien attaket.

Kalz a boanniou all o devez
Ouspen e afflijet ivez :
En he c'horf oll hi a zouffre
Poanniou meurbet d'an ampoent-se.

Ebars er poanniou a zouffras
Merk ebet en oll ne roas
Demeus a impaciantet :
En repos e voa he speret.

Gant eur joa vras hi a zouffre,
Abalamour ma remerke
E tostae dezi an amzer
Da vont da velet hor Zalver.

Rac eun dezir vras he devoa
Da güittât souden ar bed-mâ
Evit mont d'an eternite
Da garout an Autrou-Doue.

Gant kement neuze à joa
Sònjâl en Doue a rea,
Ma seblante ne zante ket
En he c'hlênved nep poan ebet.

An drouc-speret he attakas
Gant eun arrach a voa goall vras,
Hac eun drous eus an horrupla,
O klask he lakat da sponta.

Hoghen Mac'harit an Nobletz,
Leun a vertuz, a zantelez,
He doa bepret en he ene
Fizianç en madelez Doue.

Neuze edo he breur bêleg
Ebars en Konk en em rentet
Evit sicour an eneou
O rêi an instructionou.

Eur messajer a voe cacet
Da assuri d'he breur bêleg
Penaos e zoa clân meurbet
E c'hoar vat gantàn ker karet.

Mikel Nobletz, an den zantel,
Mignon da Zoue eternal,
Eno a lavaras neuze:
Entêrit-hi en Plouare.

En traon ilis Plouare
Lakit servicherez Doue:
Eno e deveus deziret
E vezo e c'horf entêret.

El leac'h ma kustum ar beorien
Goude mervel beza certen
Entêret er plaç izella
Va c'hoar baour a zezir beza.

Ar zervicherez da Zoue,
Abars ma rentas he ene,
Er spaç demeus a nao dervez
En angoni a voe ivez.

An nao dervez a angoni
A voe oll implijet ganti
Da ober actou alies
Hac a Feiz hac a Garantez.

Gant eun douçder ker ravissant,
Kement a voa eno presant
A recevas oll diganti
Exempl da ober evelti.

Neuze Mac'harit an Nobletz
O caout ouc'h Doue karantez,
Ar gomz diveza a lavaras
Jesus neuze a brononças.

Da benn eun nebeut goude ze
E rentas he ene da Zoue,
Goude eur vuez ker zantel
Ha da Zoue bepret fidel.

Clêvit kement a zo presant,
Ebars er bloavez mil c'hoec'h cant
Tri ha trêgont e zeo maro,
Ar zeitec a vis güengolo.

Ha var he bisach e zeus bet
Goude e maro remerket
Merkou demeus he zantelez
Hac ivez deus he c'harantez.

A bep kanton en em gavet
Goude he maro d'he güelet :
Intanvezet , orphelinet ,
Ha re all ganti asistet.

Da vam doa bet sur servichet
Da galz eus a dud afflijet ,
D'ar bed oll e devoa great
Muya ma c'halle eus a vat.

Ne ouffen ket dre va c'homzou
Lavarat niver a zaelou
A voe eno neuze skuillet
Sur gant an oll asistantet.

Eur c'huez mad a zo bet santet
En ilis ma zeo entêret ;
Hac er gambr ma zeo decedet.
An dra-se a zo rapportet.

Evit rêi exempl d'ar merc'het
Da zont da zisprizout ar bed ,
He buez zo bet compozet
Gant he breur pa voe decedet.

He breur bêleg en deveus bet
Gant güirionez bet assuret
Penos ne gouste ket netra
Ar miraclou dêi er bed-mâ.


En he buez e deveus bet
Digant Doue sur obtenet
Da galz a dud clân ar yec'het
Dre bedennou puissant meurbet.

Goude ma voa maro , soudan
Gant an Autrou-Doue certen ,
D'he breur bêleg voe disclêriet
Edo e c'hoar en eürusdet.

En Plouguerne eo bet ganet,
En Plouaret eo entêret :
En escopti Leon en deus bevet,
Hac e Kerne eo decedet.

Me ho suppli gant carantez
Da heuill cundu mat he buez :
Bevit gant eur güir zantelez
Ehgis Mac'harit an Nobletz.

F I N.



R. Buez Mac'harit an Nobletz a zo bet skrivet pen-
na-ben el levr Buez ar Zent a Vreiz, gant Dom Lob
deau; hac en Buez he breur santel Dom Mikel Nobletz,
eo merket ivez meur a dra edifiant eus e vertuziou ;
hac emeus re e c'hoar benighet Anna Nobletz.



E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.

